

57

CHANSON AN AMOUROUSTED

Chilaouit, ma mignonnet,
Chanson an amourousted
A zo gant eur c'hernevad vit an deio compostet

Amourousted zo eur guer
Hae a zo douç ha tener
Caus he da vil nec'hament hag ive dal vil mizer
Pa vo an noz pe an de
Daou zen yaouank a goste
Quent ma c'houfeong doare he c'haruo gante

Ar pot a goze brao
Hac ar plac'h a deus foa.
Evit beza evurus na fot nemet eun dra.
Amourousted a ra dhe
Dimezi heb dale.

Pa vouing neve eureuget,
Vad a ra d'he n'em velet,
Casi na ra met unan an oac'h hag ar vreg.

Quen bras e'ar garante
Ha quen bras an amitie
Neus an eil vit eguile hag en noz hag en de,
He ra de ze lavaret
Pell zo clefemp beza dimeet.

Tudo yaouanc, me ho ped,
Memes tra diovallet,
Liessoc'h zo dimezet vit a zo ezet.

Guelet a meump a vejou
Cals a chanchamanchou,
Er menajou e caver hep sort ambarrassou,
Pa zeu en teguezou
Cals deus a bouponou.
Unan a c'houlen crampoes
Hac eun all galletez.

Eun all zo en he gavel ho clasq donet er mes.
Ar vreg so dre an ti
Vel pa ve etourdi
Na neus den evit clevet reson vad ebet ganti.
Fachet e deus e fried
Adieu d'an amourousted.

Tud yaouanc, mar em c'hredet,
Lacait eves, diovallet,
C'houi hē an evurussan tud a so voar ar bed.

C'houi so dre ar pardonnioù
Ha dre an assambleou;
O tansal, o c'hebattal, o c'hevan taquennou.
Eun den yaouanc, mar gue fur,
So parfet he blijadur.

Hac ar re so dimezet
An darn vuyan meus goelet
Avanqueeun dra benag d'alc'hmad do evruste

Darn so hac a laer ar yalc'h
Ha darn all e ya war varc'h.
Re all a gar ar chopin, quen azvont me wawalc'h
Tud yaouanc, mar dimeet
Choaset tud fur ha parfet.

PA HI LERER EN EUN EURED A HELLER AJOUTI

He neur dont da finissay
Souhaiti ferm a ran
Yec'het dan daou zen neve, chanç a prosperite.

Men ho ped, camaradef,
Vit eur farç ne fachet ket :
Permettet e badinal en tre ar vignonnet.

Graç dimp da nem gavet c'hoas
Joaus evel biscoas
Ben an de-ma pen eur bloa, ebars ar memes plac
Ho trinka gant ho goeren
Ho trinka gant ho goeren

LENEINDRE.